

D'ar 7 a viz Gwengolo

- E 252, merzherenti santez Regina pe Rouanez, kehelet adalek ken abred hag ar Vvet kantved e Alise-Sainte-Reine a vefe Alezia e Bro-C'hall lec'h m'en en roas Versingetoriks da Gaius Julius Kaezar. War he bez e lenner: « Amañ eo bet trec'het Gallia gant Kaezar. Amañ ur werc'hez kristen a voe trec'h war Gaezar ».
- E 560, distro da Zoue sant Clodoald pe Cloud, abad, mab bihan da santez Klotilda. Goude muntridigezh euzhus e vreudeur e tibabas ren ar vuhez vanac'h nepell diouzh Pariz, el lec'h a zoug e anv diwar-neuze.
- E 705, en Hannonia (Hainaut), distro da Zoue ene santez Matelbert, abadez, merc'h santez Waltrud ha sant Visant Madelgair, c'hoar sant Landri, sant Dentelin, ha santez Adeltrud. War-lerc'h he c'hoar e voe abadez abati Melbarium hiziv Maubeuge, bet diazezet gant santez Aldegonda o moereb.
- E 962, sant Gaozelin (Gl. Gauzelin), eskob Toul. O tont eus un tiegezh brientinion c'hall, e oa noter e kañsellerezh ar roue Karl III "an Eeunek" a Vro-C'Hall pa voe anvet gantañ eskob Toul e 922. Bevañ a reas er baourentez. Goude ar freuzioù degaset gant aloubadegoù an Daniz hag an Hungariz e strivas e-doug 40 vloaz da adsevel e eskobiezh. Diazezañ a reas manati gourel Saint-Epvre ha manati benel Bouxières-aux-Dames.
- E Breizh, sant Gorun, eskob e Dol.

D'an 8 a viz Gwengolo

- Ginivelezh an Itron Varia, Mamm da Zoue. Lidet e voe da gentañ-holl moarvat e Jeruzalem, er brientiliz bet dediet d'un 8 a viz Gwengolo ha savet, nes diouzh poull probatek Bezatha, war rivinoù an ti ma oa bet ganet ennañ ar Werc'hez Vari hag anvet Ti-Anna. Merket e oa endeo er VIVet kantved e sinakser Kêrgustentin, evel ma oa bet dekredet gant an impalaer Mauricius marvet e 602. E C'hornôg, e c'hourc'hemennas ar pab sant Serj, marvet e 701, e vefe graet ul lidkerzh d'an deiz-se e Roma etre breintiliz Sant Adrian ha Santez-Vari-Veur. Diwezhatoc'h e voe staget outi gouel engehenterezh dinamm Mari nav miz a-raok, eleze d'an 8 a viz Kerzu. War harzoù Breizh he doa en em ziskouezet ar Werc'hez, er bloaz 430, da sant Maorilius, eskob Anjev, o c'houlenn e vefe lidet he ginivelezh, bloaz kent embannidigezh Mari gwir dTheotokos gant goursenez Efezos.
- War-dro 303, merzherenti sant Adrian Nikomedia a vez lidet d'ar 26 a viz Eost.
- E 647, santez Æthelburg, eil gwreg sant Edwin Norzumbria, merc'h Æthelbert eus Kent hag ar briñsez merovingat Bertha. Eured Æthelburg gant Edwin e 625 a zegasas d'e heul kanttroidigezh hanternoz Bro-Saoz d'ar gristeniezh. Goude marv Edwin e tec'has da Vro-Gent gant he bugale. Pa zistroas e voe profet dezhi gant he breur Eadbald ur villa roman rivinet e Lyminge hag eno e tiazezas un abati daouel gant menec'h ha manac'hezed. D'he zro e wiskas ar ouel en abati Whitby a veze renet gant he merc'h santez Eanflæd.
- E 701, e Roma, sant Serj Iañ, pab, genidik a Vro-Siria a zegasas d'an Iliz hollvedel ar pevar gouel en enor d'ar Werc'hez a veze lidet gant Ilizoù ar Reter. Eskobañ a reas sant Wilibrod abostolour an Izel-Vroioù.
- E 730, sant Korvinian, Gall a orin, kentañ eskob Freisingen hag abostolour Bavaria.
- E 1555, e Katalonia, sant Tomaz a Gernevez (Villanova), manac'h, eskob. Da gentañ manac'h eus Sant-Eosten e manati Salamanca e voe diuzet eskob Valensia. Eno e veze anvet an aluzenner dre benn d'e garantez evit ar beorion. Dre e skridoù a-fet azkezerezh ha buhez kevrinel e vez sellet outañ evel unan eus izili "Skol Bro-Spagn" ar XVIvet kantved.
- Er Vvet kantved, sant Kenvarc'h, ur brezhon aorin eus an hanternoz (bro-Skos a hiziv), abostolour ar feiz e mervent an enezenn (Kembre).
- En Iwerzhon sant Maolcoisne (Maelgenevez), manac'h.
- E 700, sant Dizivod (Lt. Desibodus pe Disibundus), eskob abad Disenberg, Iwerzhonad, abostolour Bayern (Bavaria).

D'an 9 a viz Gwengolo

- E 304, e Roma, merzherenti ar sent Gorgon ha Dorothea. Ofiserion brizetañ gward Diocletianus e oant hogen dre ma nac'hjont disteurel o feiz e voent jahinet kriz, staget ouzh ar gazez-goad, digroc'hennet gant ivinennoù houarn ha skuilhet war o goulzioù holen ha gwinegr hag en dibenn krouget goustadig evit o zagañ betek ar marv.
- War-dro 670, distro da Zoue ene sant Audomar pe Omer, eskob Therouanne (Nl. Therenburch), abostolour ar vMorined. Ganet e Orval e-kichen Coutances, ez eas da vanac'h e Luxovium, ken diazezañ e 645 abati Sithiu hiziv e Saint-Omer gant sant Bertin ha sant Mommelin. Urzhiañ a reas sant Wandrilh.
- En VIIIvet kantved, sant Bettelin pe Bertelin, penitiour e Bro-Saoz. Hag eñ priñs Mersia, edo o veajiñ gant e wreg, ur briñsez iwerzhonat, pa c'hanas ur bugel, hag e-pad ma yae eñ da glask skoazell e voe plaouiet ar vamm hag ar bugel gant loened gouez. Neuze e krogas gant ar vuhez penitiour dindan aotrouniezh manati Croyland bet diazezet gant sant Guthlac.
- E 1475, e Zwolle en Izelvroioù, ar gwenvidig Alan Ar Roc'h, Dominigad. Genidik eus Plouhern nepell diouzh Dinan, en eskobti Sant-Maloù, ez eas e urzh ar Brezegenerion hag e voe abostolour ar feiz en Alamagn, en Izelvroioù hag e Bro-C'Hall. Skignañ a reas pedenn ar Rozera a savas hervez ar c'hevriñoù laouen, poanuis ha klodus.
- E 1654, sant Pêr Claver, beleg jezuist, abostol ar sklavourion e Bro-Golombia. Aet e-barzh Keneilez Jezuz e Barselona da 20 vloaz, a lestras evit Bro-Golombia e-lec'h e voe beleget e 1616. Eno, betek e varv, en em roas da gemenn an Aviel e-touez ar Sklaved morian. "Sklavour ar Sklaved" e varvas gant ar faezhidigezh e Kartajena, war-lerc'h bloavezhioù a emroüsted merket gant meur a gant-troidigezh.
- E 1929, ar gwenvidig Francisco Garate Aranguren, lean eus Keneilezh Jezuz, en em roas a-hed 42 vloaz d'ar garg a borzhier e Skol-Veur Deusto e Bilbao en Euskadi.
- E Breizh, er VIIvet kantved, santez Ozvan, gwerc'hez, Iwerzhonadez, penitiourez e Pledran hag e Sant-Brieg gant santez Zerod he matezh.
- En Iwerzhon, e 549, sant Kiarran (Ciarran), abad. Hag eñ mab ur c'halvez, breur sant Donnan, manac'h e Luxovium, e voe stummet gant sant Fionnan e Clúain Ioráird. Bez' ez eo unan eus 12 abostolour Iwerzhon. Diazezañ a reas manati Clúain Mhic Nóis war ar Shannon e Meath ar C'Hornôg a zeuas da vezañ unan eus kreizennoù relijiel ha sevenadurel pouezusañ ar vro. Sevel a reas ur reolenn anvet Lezenn Kiaran.
- En Iwerzhon, 809, sant Maolaithegen, eskob Ard Macha.
- E 1628, Breur Arsen eus Kemper, Alain Loya eus e anv tiegezh, lean eus Trede-Urzh Sant-Frañsez. Ganet e Kemper e 1595, gwarezet gant an Aotrou eskob du Liscoet, ez eas da gouent Picpus e Pariz. Prezegenner gredus, e voe anvet superior kouent Rouen ha da c'houde superior e Lyon lec'h ma varvas "merzher ar garitez" oc'h ober war-dro ar vosennidi d'e dri bloaz ha tregont.

D'an 10 a viz Gwengolo

- Er bloaz a c'hras 453, distro da Zoue ene santez Pulcheria, impalaerez Bizantion a strivas da zifenn ha da herouezañ ar feiz wirion. Gwardez he breur Theodor ar C'Haerskriver e voe lezet gantañ da levian en e lerc'h. Dimeziñ a reas gant ar jeneral Marcianus a lakaas e penn ar vro hag hi o vevañ gantañ er c'hlanded. Hemañ a gengalvas senez Kalkedonia hag a skarzhas an eskibion unnaturelour gwarezet koulskoude gant Teodor.
- War-dro 670, merzherenti sant Teodar (Lt. Theodardus), abad hag eskob. Diskibl ha warlec'hier sant Remakl e penn abati daouel Stavelot ha Malmédy. Diuzet e voe da eskob Maastricht. Lazhet eo bet e rannbarzh Spire e-doug ur veaj davet Childerig II a Vro-C'Hall. Sebeliet e voe e Luik war intrudu sant Lamberzh e ziskibl.
- E 725, sant Aoberzh, eskob Avrinka (Avranches) a ziazezas santual Menez Mikael e Breizh, deuet da vezañ abati eus urzh Sant-Benead e 866.

- E 1641, e Lancaster, merzherenti sant Ambroaz Edouarzh Barlow, beleg beneadat. Evit dont da vezañ beleg e studias e Douai e Bro-C’Hall ha da c’houde e Valladolid e Bro-Spagn lec’h ma voe urzhiet en abati beneadat Celanova. Pleustriñ a reas e vinistrerezh dre guzh e Bro Lancaster e-korf 24 bloaz. Harzet e voe p’edo o prezeg da zeiz Pask hag e voe bac’het. Kondaonet d’ar marv dindan Charlez Iañ a Vro-Saoz e voe merzheriet ouzh ar c’hroug e Tyburn.
- E Breizh, er VIvet kantved, sant Kado, abad e Breizh a vevas gant un nebeud keneiled war un enezenn en aber an Intel e Belz.
- E 589, sant Finnian Magh Bile pe Movilla, abad iwerzhonat, Patrom Ulster. Ganet en Ulster e 495 e voe diskibl sant Kolman Dromor ha sant Mochae Noendrum e manati Candida Casa (Whitehorn) e Bro-Skos. Mont a reas da birc’hirinañ da Roma hag ac’hano e tegasas ur skouerenn eus Vulgata sant Jerom, an hini gentañ o tegouezhout en Iwerzhon. E 540 e tiazezas abati Druim Fionn hag hini Magh Bile pe Movilla gant ur skol stag outañ en Down e 545. Bez’ e voe mestr sant Koulm Veur. Skrivañ a reas ur reolenn hag ur penedel.
- Emziskouezadenn ar Werc’hez Vari e Noal-Muzilheg da Yann-Bêr ar Boterff (breur Florian-Mari) d’an 10 a viz Gwengolo 1874, ma c’houlennas ar Werc’hez Vari ez afe da birc’hirinañ betek Santez-Anna-Gwened o pediñ «evit Breizh».

D’an 11 a viz Gwengolo

- E 257, e Roma, merzherenti ar sent Prote ha Yasent. Daou vreur e oant, eus un tiegezh uhelidi, lakaet d’ar marv a-gevret dre ma nac’hjont dilezel o feiz. O bez a voe ratreet gant ar pab sant Damaz ha kinklet gant un enskrivadur.
- E 670, sant Adelphius, manac’h e Luxovium hag abad. Goude bezañ bet stummet en abati Luxovium ez eas en abati Habendum (Remiremont), bet diazezet gant e eontr sant Romarig, ma voe an trede abad anezhañ. Distreiñ a reas da Luxovium lec’h ma echuas e vuhez.
- E 672, sant Bodon pe Leudin (Lt. Leudinus-Bodo), abad deuet da vezañ eskob Toul. Pa oa bugel e voe benniget a-gevret gant e c’hoar santez Salaberj gant sant Euztaz Bobbio hag e herouezjont o daou ar vanac’helezh kolombanat.
- Er VIIvet kantved, e Flañdrez, santez Vinsiana, leanez, c’hoar sant Landoald. Ganet e Lombardia e ambrougas he breur bet kaset gant ar pab sant Varzhin Iañ da avielañ Bro-Flañdrez. Sebeliet e voe e Wintershoven e rannvro Limbourg hag e 977 e voe kaset he c’horf da vanati Sant-Bavon.
- E 1840, sant Jean-Gabriel Perboyre, beleg lazarat, ganet e-kichen Cahors, merzheriet e Sina evit bezañ degaset ur relijion estren er vro.
- E Breizh, e 804, sant Ozilar, eskob Naoned e-kerzh 28 bloaz.
- E 554, sant Deniel pe Deiniol, kentañ eskob-abad Bangor war Ynis Enlli e Kembre, diskibl sant Devrig e oa.
- War-dro 623, sant Glenn (Lt Gallanus), diskibl sant Koulm. Bevet en deus e Bro-Iwerzhon hag e hanternoz Enez Vreizh (bro-Skos a hiziv).
- E Breizh, e 1123, ar pac’hiad Marbod (Lt. Marbodius; Gl. Marboeuf), bet eskob Roazhon adalek 1095. Mignon ar wenvidigez Ermengard, frankat a orin, e echuas e vuhez evel manac’h e Sant-Albin Anjev.

D’an 12 a viz Gwengolo

- Anv Santel Maria. An Aotrou en deus benniget Mari dreist an holl wragez hag uhelvrudet he anv en doare ma ne ehano morse ar feizidi d’he meuliñ. Lidet adalek 1513 e Bro-Spagn e voe astennet ar gouel-mañ d’an Iliz hollvedel e 1684 evit dougen trugaregezh goude trec’hadenn Vienna a-enep an Durked.
- En IIIde kantved, en Aleksandria, merzherenti ar sent Kronidez, Leoñs ha Serapion. Dre ma c’hourbannent ar C’Hrist e voent beuzet er mor da vare an impalaer Maksimus.
- War-dro 640, distro da Zoue ene santez Eanswida pe Eanswythe a gKent, abadez. Dre ma nac’he dimeziñ, he zad ar roue Eadbald a savas ur manati eviti war an aod nepell diouzh Folkestone.

Merc'h vihan sant Ethelbert, roue kristen kentañ ar Soazon e voe hi moarvat diazevourez an abati saoz kentañ.

- E Breizh, er VIvet kantved, sant Menou (Lt. Menulfus pe Menulphus), eskob e Kemper war-lerc'h sant Kaourintin. Roet en deus e anv d'ur barrez eus Bro-vBourbon e Bro-C'Hall lec'h m'en deus echuet e vuhez.

- Er VIIvet kantved, santez Serod (Gg. Cérotte), keneilez santez Ozvan.

- E 528, sant Aelvev (Iw. Ailbhe, kb. Aelfyw, Elviz ; Gl Ailbe), eskob iwerzhonat. Da gentañ manac'h en Iwerzhon e voe diuzet da eskob Imleach. Badeziñ a reas sant Devi war enez Vreizh (Kembre). Dre e brezegerezh e c'houneze an eneoù da Zoue. Ur reolenn venec'h a zo war e anv.

- Sant Levias pe Levian, Kembre, eskob-abad e Breizh.

D'an 13 a viz Gwengolo

- Gouel sant Yann Krizostomos pe Aourc'hen o talvezout "genoù-aour", eskob Kêrgustentin, doazhour eus an Iliz, marvet d'ar 14 Gwengolo 407, e Comana er Pontos. Mab ur penn-gadour eus lu an impalaer e tremenas meur a vloaz en digenvez nepell diouzh Antiokeia a-raok bezañ beleget e 386. Daouzek vloaz war-lerc'h e voe diuzet hendad Kêrgustentin hag e arveras e helavarded hag e holl zonezonoù da zifenn reizhkredenn ar Feiz hep aon da ziskuliañ gwallhentadur ar c'halloudeion. En abeg da se e voe tennet e garg digantañ hag e varvas en harlu.

- E 413, e Karta, merzherenti sant Marselin, tribun ha legad an impalaer Honorius. Ur c'hristen deol-meurbet e oa anezhañ, mignon da sant Jerom ha da sant Eosten. Hogen mesket dre heg e reveulsi Hilarianus e voe kondaonet evel torfedour enep ar Stad ha lakaet d'ar marv daoust ma oa digablus.

- E 453, sant Moarilh (Lt. Maurilius, Gl. Maurille), eskob Anjev. Ganet e Milano e teuas e-kichen sant Varzhin e Teurgn. Urzhiet e vo gantañ ha lakaet e penn iliz Chalones. Deuet da vezañ eskob Anjev e stourmas a-enep ar brizh-kredennoù pagan war ar maezioù. Mignon e oa da sant Florentinus penitiour er Mont-Glonne war harzoù Breizh hag un deiz, er bloaz 430, ma teue d'e weladenniñ en em ziskouezas ar Werc'hez dezhañ o c'houlenn ma voe lidet he ginivelezh, bloaz kent embannidigezh *Mari gwir dTheotokos* eleze «mamm-Doue» gant goursenez Efezos.

- War-dro 629, distro da Zoue sant Amatus (Gl. Aimé pe Amé), abad I añ ar Menez-Santel (Saint-Mont) er Voj. Brudet evit e vuhez a binijenn, e yunioù hag e garantez evit an digenvez e voe abad ar manati en doa savet e Habend, hiziv Remiremont, gant e vignon sant Romarig lec'h ma teuas ivez sant Arnould; ar manati a heulie reolenn sant Koulm.

- E 1640, ar wenvidigezh Maria de Jesus Lopez de Rivas, karmezadez eus Toledo, diazevourez karmez Alcala de Henares, meulet gant santez Tereza Avila.

- E Breizh, er VIvet kantved, sant Aman, eskob Gwened, ha sant Ourzhal, penitiour e Porspoder e Bro-Leon.

- En Iwerzhon, e 640, sant Daan pe Degan (Iw. Dagán), eskob.

- E 627, sant Amat, abad, diskibl sant Koulman Veur, savour abati Remiremont.

